



Chanson

COMPOSET A NEVEZ

var sujet

AR VESVENTI.



Ebars an amzer bresant meus c'hoant da gomposi
Eur ganouennic nevez, vit a n'em amusi,
Var sujet an everrien heuil an tayarmlou,
Eus a greis ho flijadur, eya chopinadou.

Prestet o attantion, breman abars commanc,
Tud oajet a re yaouanc, quement zo en presanc,
Da glevet eur guentel, hac e c'homzou guirion,
Zo savet dan efferien hep moderation.

O c'huelet an everrien tont da fumi ho c'horn,
Eur c'hueren eus cost o fen, ar chopin en ho dorn,
Hac he n'em rejouissa, canon a huitalet,
Evel ma ra bars er gue, ar lapouset munet.

Digare mont bars an thy d'ober eur c'hornead ,
A chom e pad an de da ober ar c'horvad :
Plijadur e galon eo , e pen ar variquen ,
E gousolation , eur chopin eus e benn.

Pa ver en hostaliri , e pen ar variquen ,
A rei an trons en he doc , hac a laro quen erenn ,
Yec'het mad doc'h va mignon , a doc'h va mignonez ,
Hac aseomp deus an dol da barlant assamblez.

Va hunan a meus guelet ebars eur sort plaçou ,
A clevet alies , certen o discourjou ,
Etre an everrien , eva ho chopinat :
O parlant assamblez , int potret delicat.

Mes e forc da eva , a la fin e vent meo ,
A zav etreso chican , hac a veichou cheach bleo ,
Memes tre ar vignonet a canfartet vaillant ,
A zav discussion e ereis ho c'homplimant.

A neuse e lavarent an eil d'heguile ,
Neoquet evit blagal tout-a-fet omp ame :
Mes vit caout eur chopinad pe eur banac'h guin guen ,
A laq-fe tranqillite , a joaustet ouspen.

Aça ta va mignon Yan , neuse pa eo d'ho cout ,
Lavaret dan tavarnour digas eur c'hart lagout ,
Hac an demi quart guin guen , evit ober melanj :
Neuse tringuont o gueren neur ober ar c'hadanc.

Mes evel se e laquont cals re en ho ribot ,
Hac arlec'h a ve ret gout piou ve ar guellan pot ,
Hunan n'he a lavaras penos oa eur goas mad
Neur ober an anter heur evas nao chopinad.

Mes e gamaradet-al neuse oant quet contant
O clevet o mignon Fanc'h ober fouquiou e-hunan ,
A ractal a n'em glevont evit ober eur c'hroc ,
A neuze vo guelet scler , piou vo ar guellan pot.

Ebars an hostaliri ve clevet an douariou ,
Clasq gout pehini a bev ar muia chopinadou ,
Hac an hini ne vo quet var o listen douguet ,
Na pa brec se gant reson , na-vo quet chilaouet.

Nep za da frequanti re an hostalirioù ,
Hac a lacq en he speret da ober corvadou ,
Dre henon , vel mar gousot , trespuner paourante ,
Goude caout dispiljadur a vina ho danve.

Guelet a eus cals a dud a vije punvic bras ,
Heulia re ar vesventi zint deut da vent paour ras ,
Cetu neuse nec'hamant a glac'har a galon ,
Goude c'hoas col ar madou , col reputation.

Heulia re ar vesventi , e ma c'hir an amzer ,
A na gaver met tourmant , poan speret a mizer ,
Guel a rit ta va mignon , seler patant ac anad ,
Ar piechou miserabl dirac o taoulagad.

A n'em livra evel se , me lar dar vesventi ,
Na neusquet a blijadur nemet pa ver heni ,
Ouspen ma tispign arc'hant a vera e amzer :
O pebeus tristediguez vit ar paour quez meoyer !

Guel a veso doc'h certain besa furoc'h a se ,
A lezel gant a re al ar peza evel re ,
Guelet rer loënet brutal , pere neusquet skiant ,
Pa ve carguet ho boëlou a n'em lacq da hean.

Mes an den re gustumet bars an hostaliri
Dridal ra e galon eus ar c'hart eau-de-vi ,
Pe ar poudat gist pe zaou o tonet eus ar c'hao ,
A rei eur c'hrisic d'he fri gant an eric quen mao.

N'hini ve re antetet dont da c'hoari e bot ,
James na veso n'he ez quen n'ho tapet e lot ,
Eur gilgornaden pe ziou evit allout guel scler ,
Neuse vel eur c'has foëtet e tiredou dar guer.

Bars ar guer pa erruo , c'hoas na vo quet contant ,
Ma clef eur gomziec pe ziou henep e santimant ,
Eus e c'hrec e vugale , a memes tud e di ,
Aveichou n'he hardisso da zont d'ho goal dreti.

En e dy pa erruo , pep mare eus a nos ,
Na pa peuffe c'hoant cousquet noc'h qet evit repos ,
E renquer bea var bao da allum ar goulou ,
Evit bent en he bresañe da receo hon autrou.

O mesventi miliguet , mam an ol disurzou ,
Dstruja a ra hor c'horf , blesa an eneou ,
Hac ouspen c'hoas eo quiriec eus cals a valheuriou ,
A c'hueler o c'hoarvesout , en nombr bras a blassou.

Evel-se ta e clefec'h ! dont da n'em voderi ,
Neus avançamant ebet o tont da n'em vevl ,
Hac ouspen c'hoas dre valheur e offancit Doue
Pehini , vel mar gousot , a veil varnomp nos-de.

E var boez ar vesventi comzon en ho presanç ,
Pihini vel ma gousoc'h a ra cals a offanç
Dan henor , dar yac'het hac ive ar madou ,
A goude tout , dre valheur , da ober disurzou ,

Pez a gavan difeçon e mesq an dud yaouane ,
Potret meo , merc'het mevez , o tispign o arc'hant ,
O chom bars an tavaruiou , alies pad an de ,
Ho socchou eas cost o fen , tro an thy o vale.

Ar merc'het a oar ive nem zespuñ a vandennou ,
A neuse tennont plous ber da c'hout pehini a bevou
Ar c'hognac hac ar guin ru , a tassadou caci ;
Hac a commançon cana neuse evel mouk'hi ,

Ar voyen fal eo honas evit daspuñ danve ,
Pa ve an oac'h hac ar c'hrec en taverio nos-de ,
Abars ma teuont dar guear e mant meo a mevez :
Peseurt renquañt a ve slouas en tiaguez ?

Mes a la fin da eva e erruo an nos ,
A lavaro ar c'harguer poent eo mont da repos ,
Ac ar c'hrec pa teu d'he glasq na veso quet contant ,
Quen ma d'ho eur banac'h demeus ar guin ardan.

Mar na zenton quet outi commanço ober trons ,
Ar lugueraden pa ziou , neur zalla en he dous.
A neuse e commanco ar c'hoari ac ar bal ,
Hac varlec'h vo ret gout piou a ouiou dansal.

Ebars ar foar , ar pardon hac an assambleou ,
A c'hueler bepret an hostaliriou ,
Eus ar ganfardet joayus a potret delicat ,
E creis o flijadur o beva boutaillat.

Ne barlantan quet ama var boez eva e veach ,
An drase zo agreabl etre ar vignoniach ,
Mes me a barlan ama var boez ar c'horvadou
Ra an everrien sancet bep mare a bep tro.

An eveach , vel mar gousot , zo meurbed agreabl ,
Ebars e pep flaguez na memes henorabl ,
Da nep a ouar n'em regli gant moderation :
Ouspén ra eur vad bras a soulaj ar galon.

Na gredan quet ve n'eun a teufe da facha ,
Rac evidén va hunan lavaran memes tra ,
Mar doc'h eta , va mignon , c'hoi ever fal a zour ,
Evidoume camarad non quet fal d'ho sicour.

Mar a eus c'hoant da ousout piou neus ar son ma gret ,
E hano var paper zo Maze Beux hanvet ,
Eus a baros Sant-Thurien , hac a chóm en eur lec'h ,
Ebars eur gueric vian , e hano Rosquemec'h.

FIN.

Le 3 Février 1864.

Propriété de l'Editeur :



SON NEVE

VAR SUJET BRO AN AOUR

C'HANVET ER C'HALIFORNI.

Var ton : AN DOUE ARGHANT.

Me ho suppli, tostet aman,
Tostat hag he clefet canan,
Bian an bras, pinviq ha paour,
An tenor deus a vro an aour.

En Ameriq, dreist er mor bras,
Pel, pel a c'han, ia, pel siouas !
A so eui c'hontre pehini
A so hanvet Californi.

Neusquet pel amser er vro-se
Ne voëler nemert loëned goë :
Na ti, nag os, na hent, na tud
Nemet coajou ha loëned mud.

Breman so tri bla, pe voar dro,
En tall rivier *Sacramento*,
Eur rivier vras deus er c'hontre,
A teurvejont sevel tie.

Tud a vicher, artisanet,
Gant binviou voë di casset,
Evit toullan fondamanchou
Hag ive sevel mogueriou.

Mes pa gommansjont da doullan
A commansjont da estonan :
Quenta tol piguel deus scoët
Eur peç aour fin a deus cavet.

Eur peç aour flam, melen ha pur,
Sellet outan voa'r biñador !
Tregont livr franc a boëjo Franc
A boëse er peç bars er valañç.

Hag hi da doullan adare :
Tri seç a quefjont an de-se ;
Bemde toullent, ha dre ma c'hent,
E quevent aour fin voar ho c'hent.

Martolodet deut d'ob-r dour
Lec'h ma voaint o teñnan aour,
Vel m'ho goëljont, estonet bras,
Da vont da vete 'desertas.

Cbetu voë casset archerien
Evit clasq an desertourien ;
Mes ar re-man pa deus goëlet,
O c'hunan a so desertet.

Hag hi da durnial er blenen,
Ha da glasq aour gant ho sabren ;
Ha mar clesquent, aour a quevent,
Cat a rent aour fin dre ma c'hent.

Neuse voë casse eur bagad
Soudardet fresq, soudardet mad,
Vit gout petra voa er vro-se
Deus pehini den na retorne.

Ar soudardet pa deus goëlet,
Vel er re-al so desertet ;
Ha da glasq aour a dars calon :
Ha cat rent hep toullan don.

Er c'habiten pa neus goëlet,
Voa he escoaden desertet,
Hep taboulin, na pavillon,
A retornas d'he c'harnison.

San-Francisco so'r guer vian,
Eur gueric stris, neubet ledan,
Bean devoa evel er Roc'h
Eur pemp cant den pe neubeutoc'h.

Di retornas hon c'habiten
Pa distroas hep he vanden,
Mezus vel eur c'hi ve lacat
Hele e lost eur votes coat.

Pa raportas d'he gomandant
Penoos voa bet he accident,
Hon c'habiten voe quemeret
Evit en den disquietet.

Caër en devoa, na grede den,
Penos er *placer* (1), n'ho c'hichen
A quever aour evel flari
Mesq er fang hag an douar pri.

Quentoc'h evije bet credet
A voa taguet he soudardet,
Gant an aër vor creis ar c'hoajou
Potrament gant er c'huilet derou.

Prestec cousgoude e credjont,
Evel san Thomas, pa voëljont,
Pa voëljont aour deus er *placer*
O tont a zamou bars en quer.

Quement den valid voa er plaç
D'er *placer* soudan a redas,
A redas soudan der blenen
Evit daspign an aour melen.

Rog fin er zun ar vourc'hijen
A re ho c'hunan ho souben ;
Rac mevelien vit pris ebet
Na vije er c'hartier cavet.

Ha prefet eus an departamant
Faut eur mevel, memesamant,
A renque scuban e gambe'hou
A ciran e votinesou.

Eun den capab, selvige paour
Rog mont da blenen an aour,
A dra certen rog hir amser,
A retorne croquant der guer.

Peb hini re, en ber langach
Mil scoët er zun pe davantach,
Rac lies den en deus cavet
N'em eur amser he c'hoec'h mil scoët.

Prest d'en oll bed eo et er vrud
Demeus eun eveled burzud,
Ha deus a pevar c'horn er bed
Tud dar vro-se so direded.

Deus Franc, Brosos, ha deus ar Spagn
Deus ar Pruss, hag an Allamagn,
Ha memes deus a fonç en Asi,
A red an dud d'ar C'halfornii.

Hirie en de, a dra certen,
A so eno daou c'hant mil den,
Mes pa vije cant quement all
A vije c'hoas plaç da re all.

En pad cant vla, ha cant ouspen,
Na diaourfent quet er blenen,
Pa ne guir so er *placer-se*
Ouspen tri mil leo a garre.

Mes, jeleoet, — bars er vro-se
Mar de commun aour neve,
Er bevanç a zo quer meurbet
Ha logeis mad na neusquet.

Eun ti evel eul loch glaouër
A goustfe dec'h bars er *placer*
Cant scoët er zun da neubeutan,
Ha c'hoas a rafe glao ennan.

C'hoas na pequet eur pressec paour
Evit dastum ho tamou aour,
Nag eur chiminal d'ober tan ;
Ho coële ve eur bern trousean.

Peb livr bara a goust eno
Uguet real, pe a voar dro,
Hag eur voutaillat guin-ardant
Daou scoët dec guennec en arc'hant.

(1) Er *placer* eo an ano ve roët d'ar ple-
nenou bras en pere e va cat an aour neve.

Uguet real a goust kannan
Eur rochet voën hag hep sec'han,
Eis scoët const eun doucen uo
Hag e fritan marteze nao.

Er patates bars er c'hanon
Dreist an tro-ah so diraison,
Eul livr patates poas eno
Goust pris un anvour en hon bro.

Ha cousgoude bars er c'hontre
Vanquet mein da sevel tie:
Na vanq na goë na douar mat
Mes den na c'houl ho labourat.

Rac betec hent quement hini
Arri bars er C'halforni
A grog ennan eul goël glenvet:
Arroës an aour a c'he hanvet.

Nini peve er sort glenvet
Ne sapab d'ober man ebet,
Nemert eliasq aour bars er *placer*
Queit a neve aëlan d'ober.

Mes, ma Doue! er c'hlenvet-se
Na nequet eur c'hlenvet neve;
Ha niver dud bars er vro-man
Cals pe neuhet sant azean

Tud a beb stad, labourerien,
Artisanet, tud a bluen,
Tud a glenve, tud a justie
Leaneset, tud a illis;

Bian ha bras, yaouang ha cox,
En Spaign, en Franc, hag en Brecon
Oll a clasquomp dre vil voyen
Flourat he c'hof d'hon yalc'higuen.

Ha mar plij dec'h ma son neve
Gant aoun me'r clenvet ive,
Incontinent, mad a cassen
Ma prensach tout peb a seillen.

FIN,

